

Kanaouenou Prospêr PROUX



He Skeuden-Zen en Gwerliskin
(Son Monument)

C 8396

C8396



Kimiad eur Zoudard iaouank

War don : *Al labourer.*

Ma c'haloun a zo frailled dre nerz ma enkreizou,
Ma daoulagad entanet n'ho deuz mui a zaelou
Deud eo ziuouaz ! ann devez ma renkan dilezel
Lec'h kaer ma bugaleach, ma bro gaer Breiz-Izel !

Keno d'id, ma zi bian, kuzet barz ann draonien,
Tachen c'hlaz var behini, bugel é c'hoarien ;
Gwez ivin ker bodennek, en disheol a bere,
En pad tomder ann hanvou, e kouskenn da greiz-de.

Keno ! keno ! mamm ha tad, breman n'espefit mui
E chomfe ho mab kared da harpa ho kozni,
Evit gounid d'hoc'h bara, vel m'oc'h euz great d'ezhan,
Al Lezen zo didruez, ho kuitaat a renkan.

Nag a wech, ma mamm dener, e renkfet-hu lenva,
Pa zeui ma c'hi ankenied e dro d'hoc'h da ruza ;
Pa welfot, war an oalet, va scabellik c'houllo
Hag ar c'hefnid o steui war ma fenn-baz dero.

Keno ! bered ar barrez, douarou biniguët,
Pere a guz ma c'herent gand ar Zalver galvet ;
Da wel an Anaoun klemmuz, n'inn mui war ho peziou
Da skuilla dour binniget mesket gant ma daelou.

Keno ! ma muia karet, ma dousik kouant Mari,
Eur blanoden diremet a zeu d'hon glac'hari ;
Euruzdet ha levenez skeduz zo tremenet
Vel enn hoabl ar goumoulen gand ann avel kaset.

Na welin mui da lagad ker lemm ha ker laouen
O virvi gant plijadur, en ti pa erruenn,
Da zournik gwenn ker mibin o trei ar c'har en dro,
Da vouez flour mui na glevin o kana va gwerjo.

Pa oamp er c'hatekijou, hon daou c'hoaz bugale,
Hor c'halonou diskiant, en kuz a nem gleve,
Dirag Gwerc'hez ar c'hroaz-hend, nag a wech et touejomp
Na erruje birviken-disparti e trezomp.

Ken laouang ha dibreder, siouaz ! ne vouiemp ket
Pegement a c'houerventez er vuer zo hadet ;
Evid omp ne oa, neuze, Lezennou na Roue,
N'anveemp med eul Lezen, hini ar garante.

Keno, ma nez amezeck, lannik ma gwir vignoun,
Kamarad ma c'hoariou, ma breur dre ar galoun,
Piou a gemero breman lod ebarz ma foanio ?
Piou a gomzo gan-in me deuz ar gear hag ar vro ?

Hep-z-oun te ielo breman d'ar parrezioù tosta,
Da bigosad al leuriou barz el lazou-dorna ;
Hep-z'oun te iel da c'hounid maoud ar c'hourennadek,
Da chasa war rubanou ebarz er varadek.

Keno, ma c'hazek velen, skanv evel eun heiez,
Mistr evel eul logoden, jentil vel eun oanez ;
N'ez santin ken, didan-oun, gand an hast, o tripal,
Ma daouarn mui ne stagind ar zaeyen war da dal.

Keno ! ma c'hi keaz, Mindu, ma leal kamarad,
M'efomp ken, dre ar c'hlizen, da glask roudou ar c'had ;
Ne glevin ken, er menez, da chilpaden skiltruz,
War ma deurn mui ne zantin da deod karantezuz.

Abenn eunn nebeud amzer, kalz a vignounded ien,
Barz er zoudard divroet, hep mar, ne sonjfont ken,
Mes dr galoun te, Mindu, n'eo ket ken ankoezuz
Pell e ri c'hoaz va c'hanvou, gand da iezou klemmuz.

Keno ta plijaduriou, leuriou-nevez, prejou,
Festadegou, nozvezou, foariou ha pardonniou,
Ebatou ker birvidik, biniou zard ha sklentin,
Na drido mui va c'haloun dre da zoniou lirzin,

Keno kemend a garan, keno da virviken !
Pell ouc'h a Vreiz me varvo, mantret gand an anken,
Vel eur blantenn gizidik, evid ar vro krouet,
A renk gwenvi pe vervel, kerkent m'eo divroet.



Distro ar Zoudard en Breiz

(An dervez kenta)

Da weled a ran adarre,
Va bro gared, Menez Are, —
Pell diouz-in poan ha enkreuz !
Tridal a ran gant levezuz !

Gweled a ran, — pell en draonien,
Tour an iliz, er goumoulen ;
Ar maged, n'eur droidellad,
O tibrada uz ti ma zad.

Klevet a ran ar c'hlob'h sklentin,
Ar *vombard*, ar *biniou* lirzin, —
Eun eured a zo dre ama,
Jabadao ! ebad ! tra, la, la !

Deiz mad ! deiz mad ! kamaraded !
Gwinleizar skul ! kanomp paotret !
Eurvad d'e-hoc'h, priedou nevez,
Gand eur c'hrubuillad bugalez.

Ma mamm ! ma zad ! ma dous Mari !
War ma c'haloun ! ha stard, ho tri !
C'harzomp ! gwelomq ! vad ra gwela,
Gwela gand euruz ded ha Joa !

Sellid ouz-in ! iac'h pesk, bepred !
Kreiz ann tann ruz, kreiz ar c'hlenved,
C'houi a viraz, Gwerb'hez c'hlan Breiz,
Ar zoudad paour a zal'h ho feiz :

E Rumengol deiz ar pardoun,
M'ho trugarekeio, Itroun !
Me rai zeiz tro d'ann Aoter vraz,
O kerzet war va daoulin noaz.

Ma c'hi *Mindu*, perag iudal ?
Na zistroin ken da Vro C'hall ;
Ni a raio c'hoaz tro ar c'hoad ;
Vit ma-z-oud koz, da fri zo mad.

N'oun ken soudard ! Mamm, ma *chupen*,
Paed eo ma dle d'al lezen.
Mari ! tap krog er zizaillou
Deuz da droc'ha ma moustachou.

C'hoarzin a rez ! Ma ! keuz m'euz d'he,
C'houez ar poultr a zo c'hoaz gant-he ;
Bod int skourmet, bet in rouzet
Hogen, gand den n'int bet krennet !

Tavomp war-ze, — eur pok brema ; —
Peur ann eured ? Perak ruzia ?
Lar-ta d'am mamm, zo mamm d'ide,
Boue ma da hini gand Doue.

An hanter-noz ! Prim d'ar gwele !
Varc'hoas vintin, abred vo de, —
Ni a ielo, holl a vanden,
D'ober gweladen pen da benn.

Redeg a refomp ar prajou,
Ar parkeier, ar brouskoajou,
Gweled a vo an eubeulien,
Ar c'hezec, ar gazed velen.

Ar zaoud, al loucou dizonet,
Ar c'hole briz, an eujenet,
Ha (resped d'ann neb am zelaou)
Al loen a zoroc'h en he graou.

Ma meuz desket enn tamm gallek
Meuz ket dizesket brezonnek,
Na meuz ket ankouaet ma c'himiad,
Kernevod oun ! *Pen kil ha troad.*



Au amzer guech all ac an amzer breman

Ar bed oll, eme Yan goz, a gemer eur stum fall
Neus chomet var an douar man vel ma oa guechall !
Paourkez Yan, c'hui zo chanchet dre m'oc'h deut da c'hriza
Maes ar bed a zo chomet memeus tra, memeus tra.

Goude al loar, ar stered, ag an dévalijen
E tarz an heol bep mitin da rei demp sclerijen,
Bars an oab an alc'hueder a zao en eur gana,
Vel en amzer tremenet, memeus tra, memeus tra.

Gant e chupen erc'h skornet pa deu ar gohan kri
Da c'hourda or biziet, da ruya beg or fri,
An eil demeus eguile daou bried a dosta
Vel en amzer tremenet, memeus tra, memeus tra.

Pa deu an nevez amzer da yeeat ar parkou
Da laquat bleünz er balan, deilho bars ar c'hoajou
Lagat ar merc'het yaouank ivez a sedera
Vel en amzer tremenet, memeus tra, memeus tra.

Ar vugale zo brema begek, lem a seder,
Var meur a dra int sakwit arok gout o fater,
An avalou affuret a blij dè ar muia
Vel en amzer tremenet, memeus tra, memeus tra.

En despet d'ar veleyen, dan diaoul a de gernio
An dud yaouank zo troet terrub gant an danso,
Guell a ve gante tremen hep dibri nag eva
Vel en amzer tremenet, memeus tra, memeus tra.

Meur a seurès ve laket da zougen ar Werc'hès
He deuz guelet an deiho a henep aliès :
Ze na vir ket diouthi modest bras da ruya
Vel en amzer tremenet, memeus tra, memeus tra.

An diaoul a gollas Eva bepret a zo tentus,
Ar merc'het koant zo ive atao bresk a sentus,
Demeus ar frouës difennet kals siouas a glanva.
Vel en amzer tremenet, memeus tra, memeus tra.

Bea zo en oll keriou kals a goz rampennet
O deus roet da Zoue ar pezh n'a c'houlenn ket,
Nos de o zeod milliget a iffam o nesça
Vel en amzer tremenet, memeus tra, memeus tra.

Paotret a veler bemde o voapat ar merc'het,
Merc'het a veler ive o kaketal paotret,
Touet kals, dere'hel neubeut, a zo ar c'his brema,
Vel en amzer tremenet, memeus tra, memeus tra.

Meur a hostis ep bursud a chanch an dour en guin,
Meur a blac'h a lak pilhou do rountat e feultrin,
Broziou d'ober un tailler, an oll a glask troumpla,
Vel en amzer tremenet, memeus tra, memeus tra.

Ar Pitou hès zo barnet bepret d'an oll boaniou.
Gant ar Voavoaoon ve flemmet, brèvet a vac'hadou,
Mar chanç dez an demisi, eo dogan peurvuia
Tel en amzer temenet, memeus tra, memeus tra.

Meur a zogan a ra goab deus penn e amezek
A ne voar ked aliès eo c'hoas muioc'h korniek,
Darn all m'aint ket er vreuriès ag a garfe beza,
Vel en amzer tremenet, memeus tra, memeus tra.

Sepet ar brago toul-gouis, al lero marellet,
Ar jiletan kof-yodec, ar beruken poultret,
Ar peur-rest a zo chomet ebarz er stad ma oa
Vel en amzer tremenet, memeus tra, memeus tra.



PIPI AN DIVEAD

Var ton : *Brava pemoc'hic zo er Vro*

Pipi a zo eur goas nerzus
Eur potr gadal ag ebatus
Mez pladenec vel eun azen
Rac pa vez en tal va c'hichen
Ne voar nemed huanadi,
Pegen divead eo Pipi !

Ne ve ket red dez an goulenn
Mar c'hueze varnon e koëfen,
Mæs eur gomz demeus va geno
Pe dan hirra eur c'houpl pocko
Zo an tuont dhe gontenti,
Pegen divead eo Pipi !

Eun devez ma oamp o toma
E laras din, en eur ruya :
Guelet a rer las o lezrou
Izellet eun tam o proziou
Pe me skampo er maës an ty !
Pegen divead eo Pipi !

Disul am c'hasas kousket mad
A c'hed va c'horf e korn ar prad
Na petra rez Pipi gouër
Nemet die'haloupat dar staër
Da gerc'het dour dam difuni,
Pegen divead eo Pipi !

Eun noz ne voa nemet hom daou
(Me vo devet ma laran gaou)
E chanças dar goulou mika,
Mez deuz a ze lec'h profita
E tiredaz d'hen allumi,
Pegen divead eo Pipi !

Eur veach-all dezan e laren
Penos lies e c'hankoën,
Prenna dorjou an antre :
Tauled pled mad, mezan, deus-ze
Rak dont alfe al laer en ty,
Pegen divead eo Pipi !

Eun de ma oa dezan tomet
E c'harlinkas din va morzet
A me rakal d'er briata.
Aiaou ! mezan, c'hed dam mouga
Mo ped en gras dam vardouni !
Pegen divead eo Pipi !

Em gourve, indan eur voën fo
Oan e sellet deus an deilho ;
Kerkent va genoëk ive
Zo nem astennet vel eul loue
Em c'hichen vit o c'hontempli.
Pegen divead eo Pipi !

Paotred yaouank pa c'hoan teffet
Gounit kalounou ar merc'het
Pa zell ar plac'h eus an deilho
Choui dle sellet eus ar grio :
A neuze ne laro ket hy :
Pegen divead eo Pipi !



An Dogan

Pegen diot eo ar voazet
Pere zo nos de trubuillet
O c'hevesat o friejou
Gant aoun da zougen ar c'herniou,
Rac evrussa den a vale
E zeo eun dogan, var ma fe.

Eur vreg fidel zo puerwia
O skandalat pe o vouza,
E c'hiskignat he c'hy, he c'haz,
He matès petramant he goas.
Ya, evrussa den a vale
E zeo eun dogan, var ma fe.

Kontrol dezhi, greg eun dogan
A zo dinoas evel eun oan ;
Graio he goas vel ma karo
Biken komz r. bech na glevo.
Ya, evrussa den, etc.

An oll a zo dezan mignon,
Ar mair, ar sacrist, ar person.
Banaç'hou pez a gar lounka
Hep ma renk kamet o féa.
Ya, evrussa den, etc.

Da Vouel-Mikel, mar n'al pèa
Na neus tam da n'em ankenia ;
Termen en do pez a garo
Pal iel Fant da gaout an otro.
Ya, evrussa den, etc.

Pa ve tom a brao an amzer
Na vezo ket dalc'het er guèr ;
Gant e vreg e vo aliet
Da bourmen evit e yec'het.
Ya, evrussa den, etc.

Gant n'herruo ket re abret
Laouen e vo digemeret,
He goan prientet a gavo
Ac e vélé tom, avecho.

Mar chanc dhe itron gouilioudi
E nem guinnig ar gompiri,
Ag an oll a goa ar buguel
Deus he dad pim-patrom hanvel.

Bugale en heus a hep sort :
A re héon, re gam, re dort,
Re vrun, re du, hep kaout ar boan
D'ober anè tout he hunan.

Oll dud he dy ac he bried
Mar keret kredi zo pentet
Var an ton braz, à la papa,
Ag he diegès memeus tra.

Mar neus droukviès gant eure
Er justis na gollo morse ;
Atao hep mar en ho al lanz
Pa yelo Fantie er valanz

Diboanyus ral e zeo ar stat,
Neus mert serri he zaoulagat,
Mont er mæs eur vech an amzer,
Kana dre ma tosta d'ar guer.

Evit gouir an oll doganet
Na nint ket kerkouls lodennet,
Mæs pa n'ho de mert an hanter
O c'hondition zo c'hoas kaër.

Evit-hon-me tanfoeltr biken
Na heureujin eur femelen,
Mar ne dou din dirak testo
E vin korniek vel eur c'haro !
Rac evrussa den a vale
E zeo eun dogan, var ma fe.



Killok ar Barroz

Jannedik, Jannton ha Jannet
Ter blac'hik mignon a seder
Gant an dimezi zo troet
Da lavaraz meur a gomer.
Pa garin me mo eun anè
Rak me zo killok er ger-ma,
Mez choáz a renkan entreze
Gant se on nec'het ar muia,
Ha Perag n'allan kemeret
Jannedik, Jannton ha Jannet !

bis

Jannedik zo ken skañ he zroad !
Ken ru, ken flour he zam bégik !
Jannet zo ken lemm he lagad !
Ken tentus he diou muzellik !
Mez Jaunton zo ken brao korvet
He mouez ken karget a zouster
Ken a drid va oll goazied
Pa 'n em gavan en he c'hever ;
Ha perag n'allan kemeret
Jannedik, Jannton ha Jaot ! *bis*

Red e zeo d'in krak dimezi
Ha Jannet a vo ma fried.
Mar c'hoanta Doue anezi
Jannedik a vo an eilved,
Mar 'n em gavan intaon goude
Abenn eun toullad bloaveziou
Jannton a gemerin neuze
Evit bihannat ma foanniou.
Vel-se, ma feiz, me mo paquet
Jannedik, Jannton ha Jannet ! *bis*



AR MERC'HETAER

Abaoue an devez milliguet ma chances d'or mam genta
Kaout c'hoantaden an avalou n'eus mert poaniou er bed ma,
Mortolod, escop, devezour, pebhini neus e viser,
Mæs neus ket c'rioc'h planeden vit hini eur merc'hetaer.

Mil drubil, mil plijadur a renk bemde anduri
Ne hall ket paouës eun istant, atao en deveus sourci ;
Evel eur c'had er radenneck, ne gousk morse mert hanter
Pa ve hed an oll da gousket e red c'hoas ar merc'hetaer.

Guël e zeo bea dastumet, chadenet evel eur c'hy,
Laquet da zivoal ar grage vel a ve gret en Turquy,
Beza broudet vel eun azen, samet vel eur marc'h glaouër
Argaset evel ar bleizi, eget bea merc'hetaer.

Na neus nac henor na profit da c'honit ebars ar stad,
Kouskoude aben he ober eo ret bea dilicat,
Kavet eun teod deliberet, eul lagat lem a seder,
Pasianted eur gueniden evit bea merc'hetaer.

Bea gadal a servichus, chérisçan ar vugale,
Laret ez hint patrom o zad evit plijout d'ar grage,
Gout tremen brao deus an dud coz, silaou mad o zoliou kaër
Paëa de banac'hou lapach vit bea guir merc'heater.

Kaout diousscouarn deus ar squiltra, tevel pes a neuz klevet,
Divoal mad da nem vrabañçal eus madelès ar merc'het,
Gout an tu da liya guèvier, nac'h avechou pezh zo sklaër,
Touet e ve nos da greiste vit bea guir merc'hetaer.

Klevet prepoziou dipitus, bea boutet en kojou,
Insultet gant koz rampennet, rei a reseo boc'hadou,
Anduri meurbet aliès ar glao, an ere'h, an domder
Foeltra e gorf ac e zillat ; stard eo bea merc'hetaer.

Miret eun or da vouigourat, miret ar chass da harzal,
Mont en tyer dre ar prenest, memeus dre ar chiminal,
Krapat demeus ar mogerio, gout lampat dreistar gircher,
Bale sioul evel al logod vit bea guir merc'hetaer.

Mæs ar starta deus ar vicher e zeo gonit ar merc'hed,
Quisidikoc'h marc'hadourès na neus ket var boul ar bed,
Deus o diviz, o santimant, pep tra ve red da ober
Len memeus bars en o sonjou, vit bea guir merc'hetaer.

Vit dont aben deus eur seurès, eo red ober ar gluyen,
Gonit kalon eun everès, soubilla e c'horzaillen,
D'ar merc'het a garnem benta rei eur c'hoef, pe davancher,
Laret amploc'h evit justoc'h vit bea guir merc'hetaer.

Goude lakat e holl galloud, foueta e liardigou,
Kavet fourgas a nec'hamant, kabouillat dre ar poullou,
E vank aliès e dolliou, e teu divragou d'ar ger,
Pinous vel eur c'hoq diblunet : start eo bea merc'hetaer.

Heuzi a ran pa gomprenan pegement a drubuillou
A vizer ak a boan speret a neuz ar paour kèz Pitou.
Mæs ar merc'het zo ken tentus a va c'halon ken tener
Ma renkan despet d'am baro dere'hel da c'heuil ar vicher.



Mari Beg Arok

Ma oc'h euz c'hoant, va mignoned, da anveout eur vreg rok
Me ho konduo, pa garfet, dirag Mari Beg Arok.
Bemde wardro eun hanter heur e kluch wardreujou hedor,
Kerkent teodou pig ar c'hartier, gant eur skaon pe eur gador
A zired oll en he c'hever : an odians zo digor.

War barlen Mari, e weler eur pezh foeltren assied,
War behini kont peb komer kement he deuz inventet.
Klevet a ret ped den lipous a ia bemde d'ar c'hafe,
Ped plac'h he deuz tri ambourouz, ha ped a zo stad ennê,
A ped ozac'h a zo mêvier, ha ped a bil o grage.

Mari Beg Arok a gomand war ar c'honsaill divragou,
Heb kaout an neubeuta damant e tigor frank he genou.
Pa n'he devez war he bizach na moustachou na baro,
Eo red d'ei kaout an avantach da zikrial tud ar vro.
Gevier, sotoni, koz langach, tud a beb kalite zo.

Mari Beg Arok zo titret vel an uhella noblanz
Domach eo na va ket pried d'eun den pinvidik a Franz.
Hi eo prinsez an diegi, kontez al liboudennou,
Hi eo dukez al loustoni, markizez ar strakellou
Gouarnerez ar jolori, ha baronez ar pillou.

Kerkent a ma ve embannet daou zen iaouank da zimi,
E ve d'al lun vintin galvet he c'honsaill braz gant Mari.
Pep konseiller en gweleden a boign gant he voutou bêt.
Evid klask ar gwella moien da derri prompt an affer :
Ar plac'h a gar ar jigoden, pe ar goaz a zo mêvier.

Kerkent ha ma wel eun eureud o tond war zu an iliz
Mari Beg Arok a zired en manchou louz he hinviz.
Evel eur vioc'h o vreskin e c'haloup a-biou ar ru :
« Hola ! Katell, Jannez, Perrin, Soaz, Mac'harit, deut dustu !
Setu ama eureud Martin ! Demp da dremen ar revu.

Va c'homer, sellit euz hounnez, dislivet he davanger,
He c'horneten zo heb ampez, hag he gweleden re verr.
O ! Sellit 'ta eus an den-ma, pegen striz eo e vragou,
E' dok zo braso'h évitan, ha kalz re hir e voutou ;
Eur chemizeten zo gantan war e roched en pillou !

Pa ve eur vreg kez gouilioudet divar he bugel kenta,
E c'houlen Mari. estonet, : « Petra, nao mis zo dija ?
Me 'gave d'in oa an eureud d'al lun warlerc'h Pardon Pol,
Ha Pask n'eo ket c'hoaz erruet. Allo, gret o deus an toll.
Hep n'o devez va c'hemennet, a kement-se 'gavandrol. »

Pa gleo kloc'h iliz ar barroz o c'hervel d'eur vadiant,
Mari, gant eun troad hep botez, a erru arok ar chant
Mez dre valeurn'eus ket ezom demeus eur vouez ken raouïet
Da zikour kana *Te Deum* evid an neve ganet.
Gant he c'homerezed renk chom e-kichen dor ar veret.



Ar paour kaez Lazar

Var ma fé kamaladet
Terrupl e c'hon bet stropet,
Kredi a ren en tol-ma
E rankchen lipat ma loa.
Trou là là... trou là là...

An anko, louzen hep fri,
Vit tach dam stleja ganthi
En bro teval ar gohet
Terrub he deus c'hoariet.

Na vel kent, deus he skilfo
Meus chasset va relego ;
Mæs pell a vo ingravet
Var ma bisach he c'hachet.

Ma diou chot a zo melen
Evel eur gos anduillen,
Ma lagat anter varo
Treat on vel eur c'hant tacho.

Ma chouk a zo daoubleguet,
Ma fri neus eun troatad hed,
Teuët moust eo ma c'hof kar
Bransigellat ra ma diou c'har.

En gis deur c'hos paotr seyet
Var eun tamic baz harpet,
Er parkou en em stlejan
Vel ar c'hicher da heolian.

Red eo bet din krenn kwitad
Kement sort a gaven mad,
Ar pez so goassoc'h ouspen,
Karout pez a gasçaën.

A vikoaz e meus karet
Starda kostou ar merc'het,
Nemert ma flünec brema
Na meus ken hurz da starda.

Guech all eur banac'h guin mad
A zederre ma lagad
Brema zan pa më zec'hèt
Da drinka gant ar pesquet.

Karout a ren ar bëvin,
Al loue, ar maout ar ponsin,
Mæs brema vel eur paour kaez
Ne zebran met yod a lès.

Moget va c'horne a lamme
Pep sourci diganne-me
Mæs keno ma yalc'h bordet,
Ma c'horn ker brao kulotet.

Bars em c'halon a garien
Mont d'ober eun obaden,
Mæs ar vech-ma hep soner
E meus bet grèt eun danz kaër.

Plijout a rae din redec
Daoulampat gant ma c'hazec
Brema vel eur velveden
E choukan bars va c'hrogen.

Karout a ren mintin mad
Er mene redec ar c'had
Brema ne ran ken chasse
Met d'ar c'hoënn deus va guele.

Erfin ma meus em amzer
Gret avechou toliou kaër
Me a gao d'in o fean
Keric avoalc'h er vech man.

Mamou-ta ma fardonnet
Ma meus bet guech all lèret
Do merc'het koant fors poko,
Pa vin yac'h me o rento.



An den samet pouner

Bea'zo ebaz er gear-ma
Eun den deuz ar malevrusa
Seiz lëo tro dro kement ve gret
Oll war he chouk e zint samet :
Na neuz ked, war ar leverer,
Fallo'h aillon evit Prosper.

Mar gweler eur c'hoef chifonet
Eur golinëten difreget,
Mar ve flastret eur bern kolo,
Mar dilip eun ael dishano
Raktal e lavar eur gomer,
Piou a zo kaoz nemert Prosper ?

Mar leker, elec'h eur bod maë,
Eur vojen spern pe eun troad louë,
Mar ve drouk en korf ar person,
Mar be moréduz he zerman,
E lavaro seurez et ker :
Pioù a zo kaos nemert Prosper ?

Mar n'her ket nemeur da govès,
Na dan ofern goal aliès,
Mar chang da veur a blac'h riska,
Mar blij dar baotret mont d'eva,
Da Basq mar ve kals tapet ber,
Pioù a zo kaos nemert Prosper ?

Mar neus meur a vam nec hamant
Abalamour dho merc'het koant,
Mar golo nè gant he askell,
Vel ar yar pa voël ar sparfel,
Daoust da ze mar o dibluër
Pioù a zo kaos nemert Prosper ?

Mar gueler (pez neo ket iskl)
Meur a blac'hic kaès diavis
O kemer, dre goal blaneden,
Eun aer evit eur zilien,
Mar rank hirrât he davanger,
Pioù a zo kaos nemert Prosper ?

Mar gueler merc'het a paotret,
Vel diaoulou dichadennet
O tiredek d'an ebatou,
Pa glevont mouëz ar biniou,
Mar këont en pao Lucifer,
Pioù a zo kaos nemert Prosper ?

Mar dichans da veur a baour kaès
Tentet gant ar briadelès,
Santout nos kentâ e heuret
Digoret frank dor ar gaouët,
Ac et ar pabor gant al laër,
Pioù a zo kaos nemert Prosper ?

Mar gueler meur ozac'h lorc'hek
E tougen ar boned forc'hek,
Mar ra kals, er sakristiri,
Fals signaturio hep pec'hi ;
Mar neus mab eun tongneur frikaër
Pioù a zo kaos nemert Prosper ?

Merc'het mignon a dizoursi
Pa chanço dec'h mon en eun ty,
Mar be heno ar c'hliant ze
Sonjet skampa kvit heb dale,
Noc'h biken en brassoc'h danger
Eget pas zoc'h tost da Prosper,

En eur gir, an oll doliou kaer.
A ve tamallet da Prosper
Mar ve guelet, abenn kant vla,
An Ante-Krist o tispaka
Ractal, me bari, e c'hopfer
Ressucitet e zeo Prospert !

*Met neuz ket c'hoaz anter kant vla
Mar m'eump n'eur brezel ar gwasa,
Trec'het an Ante-Khrist Gwillou,
Savet he Skeuden d'ar barz Proux.
En Gwerliskin dirak Ti-kear :
Ressusitet e z'eo Prosper !*

